

25

AR

RENTADEK NEUD.

— War don : *Er Finister me a zo ganed.*

C'hoand am euz da gaoud eur wiaden,
Ha gouzout neza ne rann ket;
Rag me a zo, vel eur verc'hoden,
Didalvez, blang ha divorc'het.

DISKAN : *Ma c'hoarik baour, didostael,*
C'hastit buhan, me zo nec'het;
Freged eo ma niselion,
Anter uz ma broziou. Diou weach.

— Eul liorzik leun-choug a ganab,
Hag eur park braz karged a lin,
A rajo dillad ouz ann dibab,
Rag se, Joben, bezit lirzin.

DISKAN : *Me zo ives toull malerou,*
Ma broz da zul ha ma botou;
Ma goaz a zo druillennek
Ha me zo pillaouek. Diou weach.

Me zo, siouaz ! pell zo intaneyz,
Ma bugalez zo demezel ;
Red eo d'in kaout mevel ha matez,
Jervijet fall ec'h oun bepred. *Ma c'hoarik paour....*

Me ma unan, ebarz ma lochen,
Pa vez ma goaz o labourat,
A gar, ma c'has gwenn war ma barlen,
Staga tammou war ma dillad. *Me zo iver...*

— Me a renk pedi ma mitijen,
D'ober kouez war ma zraou louz ;
Hag e leverond d'in, luduen,
C'houi ra ann anter re a drouz. *Ma choarik ...*

Ma hellse Pipi gounid arc'hant,
Me brense lanvez a verniou ;
Ila war ma c'har, c'hoaz laouen ha drant,
Me nezse moan ma neudennou. *Me zo iver...*

— Illo Pipi, gand eiz gwennek bemdez,
N'hello biken gounit trewalc'h ;
Rag evit prena berniou lanvez
E renk beza pouner ar ialc'h. *Ma c'hoarik ...*

Nann, Pipi geaz hag hen daoublegel,
O poania stard e pad ann deiz,
Eunn tamm butun, p'en deve prenet,
Ne chouum netra gan-in, paour keiz. *Me zo iver...*

— Ma karit c'hoennad ma c'hanabek,
Ma farkad lin, Fanchonik koz,
Me roio d'eoc'h, gand ann Nedelek,
Danvez lien ha meur a vroz. *Ma choarik ...*

A greiz kaloun e rinn kement-se,
Trugarez d'eoc'h, ma c'hoar Joben,
Ho c'has d'ann dour da cogi iver.
Ma hellfenn ober e rasenn. Me zo iver...

— Pa vez lin daro er parkou
Ha kanab hir er c'hanabek,
E vo braeiou ha paluc'hennou,
Ha kribinou d'ho c'hribat c'houek. *Mo c'hoarik....*

Neuze iveau ar iaouankizou
A c'houlenno eunn tamm didu ;
Rag setu koulz ar rentadegou,
Evel gwechall ; sonj oc'h eus-hu ? *Me zo iveau....*

— Gwir a leverid, amezegez,
Gwechall goz enn hon iaouankiz,
E oa enored ann nezerez,
Hag ar baotred he zelle piz. *Ma c'hoarik....*

Me a raio, pa mo ma danvez,
Eur rentadek ouz ar gaera ;
Ar merc'hed iaouank, gant karantez,
A nezo flour enn eur gana. *Me zo iveau....*

— Ia, Fanchonik, grid eur rentadek
Hag o pezo neud da steui ;
Ar gwiader a gavo abek
Gand he vare'h koad da vond d'ho ti. *Ma c'hoarik....*

Ne ked awalc'h rei lin da neza,
Ober eur fest zo red iveau,
Ha rei da zibri ha da eva
D'ann neb a rai neud gant lauvez. *Me zo iveau....*

Ha setu bet al lin o sec'ha,
Prened ar vrae, ar baluc'hennou ;
Ar c'hribinou kased da stoupa,
Ha polizi leiz ar varlen.

DISKAN : Paotred iaouank, paotret lirzin,

Dire did holl da gerc'het lin ;

Kasit-han d'ho maestrezed,

Gant hasd e vo nezed. Diou weach.

Hag ec'h a Iouen, Fanch ha Jakez,

D'ar meleriou tro war zro,

Ha gant-ho godelladou lanvez,

D'ar merc'hed iaouank ind ho ro.

DISKAN : Hag e taper ar c'har neza

Diwar ann are'h el lea'h ma ioa ;

Ha war ar rod ar gorden,

Er werzid ann neuden. Diou weach.

Ouz ho c'hostez kleiz ar stagelem,

Hag ar gegel koant rubanet,

E chasond hag e troont pergen,

Kar ar vamm goz a zo nec'het. Hag e taper.

Ha war ann traouil he c'houec'h kuden,

Godik a c'hoarz ker brao ha tra,

Evel he bleo eo moan he neuden,

D'ezhi e vo ar priz kenta.

DISKAN : E ti Fanchon, dimeurz kenta,

E vo ar fest gant kalz a joa,

Eno e vo evajou,

Ha boëd mad d'ar genou. Diou weach.

Setu ar c'hudennou rodellet

Ha war bep hini eur rozen ;

E mant er baner vraz lerennet

Gand eur voutaill hag eur weren. Et ti Fanchon.

D'ann hostaleri, dre ar parkou,
Ec'h a gand he fevar' real,
Ha gwin-ardant er vontail c'houllou
A vez diskennet rak-tal. *E ti Fanchon...*

Eul lipaden digand anu hostiz
A vez d'ezhi kinniget,
Hag e c'hast buhan astenn be biz
Gan dann aoun da veza gwelet *E ti Fanchon...*

Ru he senn evel eur gokarden,
Aweled evel eur iar veo.
Ha, rannet gant-hi he bleo melen,
Ec'h a d'ar ret a dreuz ar reo. *E ti Fanchon...*

Ha, diout-hi eur pez kailharen,
Ann diveza ec'h erruo;
Naonteg all a zo e ti Iouen
O c'hortoz anezhi pell zo. *E ti Fanchon...*

Ha d'ann ti pri ec'h a ar bagad
ENN eur gana : tra la la la,
Seder ho beg ha lemin ho lagad,
Ec'h eond holl enn eur gana :

DISKAN : *E ti Fanchon hirio eta*
E ma ar fest gant kalz ajoa;
Eno e zo evajou,
Ha boed mad d'ar genou. *Dieu weach.*

E loch-kar Gwillou eunn daol savet,
Gand eur skeul hir ha koz plenken,
E dro d'ezhi paotred ha merc'hed
A chas didrouz war ar souben. *E ti Fanchon...*

Pemp anduillen ha sez gwadegen,
Eur joten bore'hel hag eur c'had
A zo digased er chaoudouren,
Gant patatez ha loaiou koad. *E ti Fanchon...*

Ann holl verc' hed a ia d'ho faner
Hag a dap gwin ha gwin-ardant;
Ar skudellou, ar gwer a stoker
Hag ec'h ever laouen ho drant. *E ti Fanchon...*

Dindan eunn darbod, war ann trebe,
Fanchonik koz, gant kalz a stad,
A ra tan sklear, gant plouz he gwele,
Da ober d'he zud kafe mad. *E ti Fanchon...*

Pipi-ludu, o tivogeda,
A gaser tomim ruz war ann daol,
Hag evid ober d'ezhan iena
ENN hini-kre e krog an holl. *E ti Fanchon...*

Goude ma oe ann daol dieubet
E tispakaz ar c'hudennou;
Rag, kent evit beza meo kollet,
Ne vez ket fall rei ar prijou. *E ti Fanchon...*

Da C'hodik ec'h eo ar mouchouer
Ha da Iouen ar gravaten;
Ha war bœz ar penn e leverer,
Ouz ho lakaad enn ho c'herc'hen :

DISKAN : *Nezed e deuz chouec'h kuden voan,*
Hag uguent plac'h zo gand unan;
Enor eta da Iouen
Ha da C'hodik laouen. Diou weach.

War gourn ar c'hleuz e ma ar zoner,

Ha setu krog ar jabadao ;

Ha potr ha plac'h e dro e troer

Gand eur boan vraz o chouumm er zao.

DISKAN : *Plijadur zo enn abaden*

Pa vez saved ar gwin d'ar penn ;

Eno e lamper huel

Dirag ann neb a sell. Diou weach.

Ann heol a ia d'he doull kouskoude ;

Red eo troc'ha ar c'hoari gaer,

Ha mont war zu ar gear adarre....

Ar vamm a grozo c'hoaz emberr ! *Plijadur zo....*

Hag ar persoun, ouz krec'h ar gador,

Disul marvad a lavaro

N'ho deuz ket bet nemeur a enor

Ann dud iaouank a ioa eno. *Plijadur zo....*

Da noz kouskoude e sao eur gann

E tre ar baotred, ar merc'hed ;

Anez ann dra ze, war a welann,

Ne vez netra great mad ebct.

DISKAN : *Taol dourn aman, taol dourn du-hont,*

War ho fenn toull holl e kouezont ;

Darn ebarz er chaoudouren

Ha darn all er souben. Diou weach.

E deiz wärlee'h, blounsed a daoliou,

Dirag ar mear, mezek, pikouz,

Ec'h eont da ober ho c'hlemmou

Hag e reont c'hoaz kalz a drouz. *Taol dourn....*

C'houi merc'hed iaouank, merc'hed kristen,
Selaoud holl eunn ali mad :
« Enn hostaleri ne d'it biken,
Ha grit enor d'ho mamm d'ho tad. »

DISKAN DIVEZA : *Dilezid ar rentadegou.*

Ann hostizien, ho bannac'hōu,

Ha karet gand ann holl dud,

N'ho po ked a well trud. Diou weach.

I.-M. AR IANN.

**Ar ganaeuen man a gaver e Gwengamp, e
ti ann oberer, tosd da varc'had ar pesked
ha d'ar butun braz.**

P. AR GOFFIC, mouller Gwengamp, a n'em garg da
ober an holl labouriou brezonnek a vezod digased
d'ezhan, war he goust, pe war gousd ann oberer.

Gwengamp, e ti P. AR GOFFIC, Mouller.